

# DIALOG

Entre un Doctor hag eur Buguel

---

AN DOCTOR

BONJOUR Mabic : pelec'h it hu ?

AR BUGUEL

Da glask eur Mestr e zàn eun.

AN DOCTOR

Me zo Doctor, ha mar kerit,  
Me rai skol d'êc'h mar am pedit.

AR BUGUEL

Bet eun er skol gant Doctoret.  
Ha tout o c'havan borodet,  
O klask deski da beb-unan,  
Ar pez ne ouzon ket o-unan.

AN DOCTOR

Petra na voar an Doctoret ?

AR BUGUEL

Meur a dra zo ne ouzont ket.

AN DOCTOR

Ha te a voar mui egueto ?

AR BUGUEL

Mar kirit, ni a zisputo.

AN DOCTOR

Te a zisput ouz eun Doctor !

AR BUGUEL

Ho respont a rin gant enor ;  
Ha ma offec'h goulen netra  
Na roïn réson déc'h anezâ.

AN DOCTOR

Piou en deus krouet ar bed-mân !

AR BUGUEL

Nep a rêr Doue anezân.

AN DOCTOR

A te voar petra eo Doue ?

AR BUGUEL

Allas ! ne oun ket, na c'houi ive.  
Dre ar feiz deomp oll eo desket  
Kement a zo en deus krouet,

Var guement a zo eo souveren,  
Da guement zo e kourc'hemen ;  
A nep ne zentont ket ountâ  
Ne vank james d'ho funissa.  
Ouspen, e zeo universel,  
E c'hel tout e zeo eternal ;  
Mes ne ouffe den explica  
Na renta reson aneza.  
*O altitudo !* no ellomb ken ;  
Adoromp-en hep e gompren.

AN DOCTOR

Petra dle an oll da Zoue ?

AR BUGUEL

E zervich corf hag ene.

AN DOCTOR

Peur a penos er servicher ?

AR BUGUEL

Pa ra peb unan e zever.

AN DOCTOR

Petra e dever peb unan ?

AR BUGUEL

Dever an oll guitibunon.

AN DOCTOR

Petra eo dever an Doctoret ?  
Pratica ar mad o deus desqet.  
Rag inutil ha coll amzer  
Eo desqi ar mad hep e ober.

AN DOCTOR

Petra eo dever eun Buguel ?

AR BUGUEL

Desqui beza eun den santel.

AN DOCTOR

Peur en em goll eur c'hrouadur ?

AR BUGUEL

Pa ra d'he dad displujadur.

AN DOCTOR

Petra ra dezan mont da goll ?

AR BUGUEL

Beza re lêzet e oll.

AN DOCTOR

Pelec'h e tisquer follentez ?

AR BUGUEL

O henti goal gompagnunez.

AN DOCTOR

Piou zo danjerus da henti ?

AR BUGUEL

Neb so sujet da sotoni.  
Dibaot buguel a hent tud sod,  
Eus a sotoni na zesk lod.

AN DOCTOR

Piou a respount euz anezo ?

AR BUGUEL

Nep a zo tad a mam dezo.

AN DOCTOR

Petra eo dever tad ha mam ?

AR BUGUEL

Miret o vugale divlam.

AN DOCTOR

Penos ec'h ellont-y ober ?

AR BUGUEL

Oc'h o suja da chom er guer.  
Ma o lèzont re da vale,  
E vin libertin heb dale.

Rag al lesvam n'eo ket karet  
A galon vad gant minoret ;  
Dibaot lesvam a gar ive  
Bugale all keit hac e re.

AN DOCTOR

Ha te oar micher priedou ?

AR BUGUEL

Clêvet o meus ho douareou.

AN DOCTOR

Peur vez carantez etreze ?

AR BUGUEL

Pa ne zefot netra deze.

AN DOCTOR

Ha peur e vanq an union ?

AR BUGUEL

Pa vanq dezo pourvision.

AN DOCTOR

Ha peur e vezont en coler ?

AR BUGUEL

Pa vanq unan en e zever.

AN DOCTOR

Piou a zo cassaüs d'an oll ?

AR BUGUEL

An diaoul hag eur vreg foll  
En eur dezert eo guell beza,  
Ha caout heno peoc'h da veva,  
Eguet n'en deo chom assambles,  
Gant greg ebet, m'ar deo folles.

AN DOCTOR

Hag ar graguez a gar ar guin ?

AR BUGUEL

Eus an enor-ze n'int ket dign.  
Eur vreg zo custum da eva,  
Eus a bep tout ne dal netra,  
Oc'h peb honestis e serr dor,  
Hag ous peb pec'het e tigor.

AN DOCTOR

Petra servij canna eur vreg ?

AR BUGUEL

Laquet e maliç da redec.  
Ne zeus serpant dangerussoc'h,  
Leon na dragon terruploc'h

Eguet eur vreg zo en coler ;  
Ouz e c'hanna zo mil danger.

AN DOCTOR

Pelec'h e cafet-hu eur vreg vad ?

AR BUGUEL

D'an eo eranker mont d'ec'herc'had.

AN DOCTOR

Nac ar plac'het, va buguel qèz !  
Ha te c'heus ounte carantez ?

AR BUGUEL

Va zad en deus va c'helennet  
Ne dostain james ouz plac'het,  
Rac tromplus int calz aneze,  
Ha collet ar bed-ma gante.  
O min a zo douç eguis mel,  
Hac a zeboch meur a vuguel ;  
Mes ne vezet ket pell ganto  
Er guis ar vesti na dint c'hoero.

AN DOCTOR

Petra a ra da galz a dud  
Divar ho fenn caout mil disput ?



AR BUGUEL

Petra ma zeo an dud-se sot  
Eus a vil valeur clasq o lod.

AN DOCTOR

Ha te anav plac'h fur abet ?

AR BUGUEL

Na meuz ket kalz anavezet :  
Ar plac'het fur var a glêvan,  
N'en din ket commun er vro-man

AN DOCTOR

Pe da léc'h eta int-hi êt ?

AR BUGUEL

Elec'h ne zeus ket a voaset.  
Biskoas plac'h fur, fur na voe pell  
O henti goas, na ne voe vell.

AN DOCTOR

Ha ne dleer ket en em henti  
Evit kaout lec'h da zemezi ?

AR BUGUEL

Demezi a zo permetet,  
Mes sotoni eo kemeret

Eur plac'h e deus meur a c'halant,  
Hag eus an oll a zo kontant ;  
Guel eo ganèn kaout eur mignon,  
Eguet eur plac'h en donêzon.

AN DOCTOR

Ha te c'heuz kals a vignonet ?

AR BUGUEL

Ne anavezàn mignon ebet,  
Ar vignonet eus ar bed-man  
Zo inconstant var a glêvan.  
Dibat a zen a vez tromplet  
O re fiziout en vignonet.

AN DOCTOR

Pegueit e pad ar vignonach ?

AR BUGUEL

Bete'n ezom pas davantach.  
Nep an deus arc'hant hag o ro,  
A gav vignonet e peb bro ;  
Mar deu ezom dezan goude,  
E vignonet en dizene.

AN DOCTOR

Petra na nep a brest arc'hant

Da eur mignon hep kaout goarant ?

AR BUGUEL

C'hoant koll en deus, hervez fêçon,  
Hag e arc'hant hag e vignon ;  
Kenderv gompez vi, pa bresti,  
Ha den ingrat pa c'houlenni.

AN DOCTOR

An nep o ra eun donéson,  
Petra sonj-èn en e galon !

AR BUGUEL

Sonjal a ra en devezo  
Daou c'hement mui eget na r ?  
Penevert se serténamant  
Neubet a zen a rae present.

AN DOCTOR

Hag en zo den e nep kanton  
N'en deus adversour ha mignon ?

AR BUGUEL

Dibaot den a zo er bed-ma  
N'en deus er c'har hag er c'hassa

AN DOCTOR

Pe diouz piou e ranker tremen ?

AR BUGUEL

Diouz ar bed oll, mar be moyen  
Rag ne zeus den na ell ober  
Ha droug ha mad gant an amzer.

AN DOCTOR

Pelec'h e sao disantion ?

AR BUGUEL

E leac'h ma vank soumission.  
An dud superb a zav atao  
Eun disput benag etrezo.

AN DOCTOR

Na pe ous piou na ranker ket  
Kaout james disput ebet ?

AR BUGUEL

Ne dleer kaout gant hini  
Ma na ellet ket trec'hi.  
Marc'h a resist ouz ar gentrou :  
A ra gaou braz ouz e gostou :  
A sot eo den da resista  
Ouz neb zo creoc'h egeta.

AN DOCTOR

Penos e fach ar vignonet,

Na peur na vezont akordet ?

AR BUGUEL

Divar ar gwin peur-liessa  
E kustumont en em facha ;  
Ha d'o akordi goude-ze  
E ranker kaout gwin adare.

AN DOCTOR

Ha te voar ivez eva gwin ?

AR BUGUEL

Re yaouankis ê c'hoas va min,  
Gant an Doctoret el lezàn,  
A rei guell usach anhezan.

AN DOCTOR

Nep zo pedet da eur banket,  
Ha n'eo ket sot ma n'en da ket ?

AR BUGUEL

Furroc'h ê kalz ma chom er guêr,  
Ma na voar eva dre voder.

AN DOCTOR

Petra ra an hini a ev re ?

AR BUGUEL

Diski d'ar bed oll e zoare,  
Pa vez secret, mar bez mezo,  
Kement a voar a lavar. o.  
Ha kalz c'hoas avichou ouspen,  
Pa zao e vanne de benn.  
Ar paoura tout, evet dezàn,  
A zo pinvidik emezhan ;  
Ha gouskoude eu deveus poan  
O kaout yod silet da goan.

AN DOCTOR

Piou a ra dud gwella cher ?

AR BUGUEL

Nep en deus joa oc'h e ober,  
Diganteur mignoneo gwel kaout dour  
Eget gwin digant eun traitour.

AN DOCTOR

Mar ez pe arc'hant, te efe gwin  
Evit beza yaouank da vin ;  
Mes n'elles eva nemet dour,  
Abalamour ma zout paour.

AR BUGUEL

Me ne meus nag arc'hant nag aour

Ha gouscoude ne don ket paour ;  
Pinvidik on koulz ha nikun,  
Pa zon kontant euz va fortun,  
Ha klevet a meus e peb lec'h  
Eo gwell dour a bara sec'h  
Eget kaout archant leis an ty,  
Ma neo kontant nep en deus-hi.

AN DOCTOR

Piou a zezir ha n'en deus ket ?

AR BUGUEL

Nep a frip ha ne c'honit ket.  
Dibaog eo gñelet eur prodig  
O chom pell amzer pinvidic,  
Dibaot ivez eur feneant  
A zestum kals eus a arc'hant.

AN DOCTOR

Piou zo beo hag en defe naon ?

AR BUGUEL

Nep o chom re bel var e skaon.

AN DOCTOR

Piou ne verit ket a zikour ?

AR BUGUEL

Nep a zo krèn, ma na labour.

AN DOCTOR

Petra ê avantach ar re baour :  
Var nep en deus arc'hant hag aour ?

AR BUGUEL

Eun avantach hag a zo kaer ;  
N'o deus ket aoun rag al laer ;  
Rag na veler ket al laeron  
O vont nemeur en o c'hanton.

AN DOCTOR

Pelec'h eta e vezont-hi ?

AR BUGUEL

Elec'h ma santont eus ganti.

AN DOCTOR

Piou zo kustum da laeres ?

AR BUGUEL

Nep en deus aon rag paourentez.

AN DOCTOR

A kreski ra ar voyen



O kemer madou an estren ?

AR BUGUEL

James den ne binvidika  
Oc'h ober gaou ouz e nessa  
Ar ma dou drouk aquisitet  
Na brosperront gant den ebet.

AN DOCTOR

Nag ar madou destumet pront

AR BUGUEL

Disilla prest a gusumont ;

AN DOCTOR

Hag al laeron a ell miret ?  
Ne defe ket a boan speret

AR BUGUEL

Natur al ler eo beza lent,  
Caout aon ha spont pa za en hent.  
E sonj dezan e zeus bepret  
Eur re benac oc'h e redet.

AN DOCTOR

Pe seurt laeron zo er ber-ma ?

AR BUGUEL

Difficil ve o nivera ;  
Rac ma ve an oll examinet,  
Nebeut a zen just a gaffet ;  
Hac ar pez am eston muia,  
Hac a ra poan din da sonja,  
Eo ma renter en peb canton  
Enoriou d'ar brassa laeron,  
Hac eun nombr bras a re dister  
Dirag an oll a bunisser.

AN DOCTOR

Piou a gar enor er bed-ma ?

AR BUGUEL

An oll a zo contant aneza.

AN DOCTOR

Piou a ra enor de nessa ?

AR BUGUEL

Nep en deus carantez ounta ;  
Renta enor hep carantez,  
Zo trahison pe treitourez.

AN DOCTOR

Peur a chench an dud faltazi ?

AR BUGUEL

Pa gresq ar madou en o zi,  
Dibaot hini, mar deus nicun.  
Na chench humor pa chench fortun.  
Ar fortun vras, an enoriou,  
Eus ar zent a ra dicoulou.

AN DOCTOR

Nag ar re a glasq enoriou,  
O publia o vertuziou ?

AR BUGUEL

Dibaot ar yar na goll e vi  
O cana re goude dezvi,  
Ha dibaot den en em bompad  
Na goll e boan oc'h ober vad.

AN DOCTOR

Ha te c'heus joa eus an enor ?

AR BUGUEL

Ne glaskan ket a zizenor.

AN DOCTOR

Pe an enor pe ar madou  
Eo ar gwella eus a zaou ?

AR BUGUEL

Gwel eo brud mad ha bep-hini  
Eget kaout madou leis an ty.

AN DOCTOR

Hag ar bed oll, a glask enor ?

AR BUGUEL

Coulz an azen hag an doctor,  
Dibaot an den, mar deus nikun,  
A zo kontant eus e fortun.

AN DOCTOR

Petra a gredes te eus an dud  
A zo kustum da gaout goal vrud ?

AR BUGUEL

Dibaot chiminal a vogued  
Anez na ve tan en oalen :  
Dibaot en deus goal renom  
Na dê klouar ma na dê tom.

AN DOCTOR

Pe oc'h tra eus te joa ?

AR BUGUEL

Ous eun dra vad par er c'havan.

AN DOCTOR

Petra ar mad a blij dide ?

AR BUGUEL

Beza bepret en graç Doue.

AN DOCTOR

A te ac'h eus c'hoarzet biscoas ?

AR BUGUEL

Ne gredan em be c'hoas,  
Klevet e meus o re c'hoarzin,  
Ne zestumer nemet chagrin,  
Goude c'hoarzin e teu gwela,  
Goude c'hoari huanada.

AN DOCTOR

Perag ma remerker en peb den  
Brema trist hag ember laouen ?

AR BUGUEL

Allas dre ar c'henta pec'het  
D'an inskonstans omp oll sujet ;  
Ha na ell den moralamant  
Beza parfetamant contant.  
Ken a ello evit biken

Possedi ar mad souveren ;  
Rag bepred an adversite  
Zo harp eus ar brospérité.

AN DOCTOR

Ha te voar ive petra ra  
Ma zeus kalz kontant er bed-mà,  
Ha kalz all pere n'en din ket,  
Karguet a chagrin o speret ?

AR BUGUEL

Ar stad en deus ar c'houstians  
Peurvia a ra differanç,  
Rag nep a vev en güir gristen  
Zo paciant en e anken :  
Evel Job int kontant bepred,  
Er c'hlenvet koulz hag er yec'het :  
Bepred o deveus resignanç  
D'ar gundu eus ar Brovidanç  
Mes er c'hontrol, an dud mechant  
A souffr atao diezamant.

AN DOCTOR

Perag eta na chenchont-hi ?

AR BUGUEL

Difficil bras eo o distrei ;

Kos guezzen zo drouc da bleaga ;  
Keut a torfe eguet eona.  
Eun den yaouank da fall pa za,  
Ne voella ket evit kossa,  
Pe ma chench eun draic benag,  
Ne chencho ket a galon vad.  
Eur c'hoas louarn hag an dare.  
Guelet eur yar c'hoas a garre,  
An nep na chench a vir galon.  
A gar ar goal occassiol.

AN DOCTOR

Me vel ervat, buguel yaouank,  
Ne zefot ket did a skiant,  
Mes lavar din pez seurt micher  
A guemeri gant an amzer ?

AR BUGUEL

C'houi zo Doctor ha den savant,  
Lavarit din ho santimant.

AN DOCTOR

Me falle din, pa zout habil,  
Rei did eun etat difficil.

AR BUGUEL

Difficulte zo partout,

Roit din unan eus va c'halloud.

AN DOCTOR

Me vel ervat ne gares qet  
Nac ar gragez, nac ar merc'het ;  
Ma o c'harfes, e raes fortun  
O temezi coulz ha nicun ;  
Mes pa ne zint diouz da zivis,  
Ret eo did beza den a ilis,  
Ha mar qeres, en eur redec,  
Me tisko da veza belec.

AR BUGUEL

Eus a guement-se n'on qet dign,  
Ha ne garan ket eva guin.

AN DOCTOR

Petra vezi-de-ta, manach ?

AR BUGUEL

Aon bras am be da gaout voac'h.  
Ar froc zo diez da zougen,  
Ha me gred a zo meur a zen  
Ma c'halfent ho chench ouz rochedou  
A rafe franqis er c'houentchou.



AN DOCTOR

Me vel ervat, diouc'h da humeur,  
Na vezit ket na Tad na Breur ;  
Mes mar qeres da viana.  
Avocat ec'h elli beza.

AR BUGUEL

Ma ven avocat, e ranqfen  
Souten ar gaou hac e zifen.  
Ha rei cusul da peb hini  
Diouz e humor ha faltazi,  
Pe aotromant em dismeğanç  
Chom hep pledi en audianç.

AN DOCTOR

Petra vezit-te ta, soudard ?

AR BUGUEL

Na zon ket kustum eus an art,  
Ar zoudardet oll peurvia  
A zesq deboch, a zesq pilla ;  
Hannes a zo eun etat fall ;  
Ret ê klask din eur vicher all.

AN DOCTOR

Pa na blij etat ebet dit,  
Ret ê din da gaç da hermit.

AR BUGUEL

Roït eta din eun hermitach,  
Ne c'houlennan ket davantach,  
Rag evit chom etouez an dud,  
E mènes aon bras n'am be goal vrud.

AN DOCTOR

Pe seurt goal vrud a pezo-te,  
Mar bevez mad hervez Doue ?

AR BUGUEL

Ar bed oll a zo dikriet,  
Ha no defe bet faziet !  
Ar veleien koulz ha re all  
A zo sujet d'an teodou fall ;  
Ar venec'h en ho c'houentchou  
N'int ket exant diouz têodadou ;  
Ar priedou, ha tad ha mam  
A zo bepred dindan o blam ;  
Ar graguez kèz hag ar merhet  
A zo gantho disenoret ;  
Mestr ha mestrez o tempesti,  
Servicher o feneanti,  
Tud a justic o revina,  
Ar varc'hadourien a trompla

An dud-jentil o voal-drêti,  
Ar baysantet o vurmuri ;  
Ne zeus Itron na demezel  
A vez exant diouc'h o zravel  
Ar bed oll zo tud fall dezo,  
Ne chommin ket gante er vro.

AN DOCTOR

Pa c'heuz aoun rag an téodou fall  
Me royo did eun avis all :  
Studi kaer a bez eun Doctor,  
Den na doucho eus da enor.

AR BUGUEL

An Doctoret koulz a re all  
A zo sujet d'an têodou fall ;  
Henoret ve o c'halite,  
Ma ne ve o superbite.  
Honnez eo viç an dud savant  
Gant vanite eus o skiant.

AN DOCTOR

Va buguelic, fouettet viot,  
Rac re scanvic e zoc'h a dêot.

AR BUGUEL

Mar bezan fouettet, me zo zur

N'em am fouetto ne vo ket fur :  
Perac fouetta eur buguel qêz,  
Rac ma lavar ar virionne ?

AN DOCTOR

Ar virionnez zo cassaüs

AR BUGUEL

Ia, d'an neb a zo cablus,  
Ret eo lezel nep en deus gal  
D'en em grafat ha da c'hrongnal.  
Neb a gunduo goal vuez,  
A vezo flemmet alies.  
Parlant a rit euz a fouetta :  
Fouetit hoc'h azen da guenta,  
Ha' mirit ho skiant ganeoc'h ;  
Me gavo güel mestr eguedoc'h

FIN



